



Penaos sevel un

istor ?

Deuit gant ho c'hoant krouiñ !

(Senario, Bandennoù-treset, levrioù, abadennoù-bev...)

Eus an 18 d'an 23 a viz Gwengolo 2018

Groupe Ouest, Plouneour-Trez

Eus an 22 d'ar 26 a viz Here 2018

Stumdi, Landerne

Bet savet diwar ur c'henlabour etre :



AR STUMMADUR BERR HA BERR



Petra eo ?

Ur stummadur war ar binvioù da sevel istorioù evit ar sinema, ar bannoù-treset, al levrioù, an abadennoù bev...

Savet eo bet ar stummadur-mañ a-drugarez d'ur c'henlabour etre kreizenn stummañ *Stumdi*, aozadur stummadurioù micher d'an dud deuet ha *Groupe Ouest*, Ahel European Krouiñ er Sinema.

Sizhunvezh kentañ (e *Groupe Ouest*)

Tri ahel a vo lakaet war-wel :

- Displegañ ar pazennoù evit ur raktres kentañ (film, teulfilm, abadenn vev, romant...) gant frammoù solut.

- Sikour ar berzhidi da binvidikaat o barregezh da gaout mennozhioù gant atalieroù pleustrek.

- Kizidikaat ar berzhidi war penaos sevel ur film gant ur budjed strizh : LIM (Less Is More).

E-pad ar sizhunvezh kentañ e Plouneour-Trezh e voc'h lakaet asambles gant tud eus pep lec'h (Frañs ha pelloc'h) hag ur stummer(ez) brezhoneger(ez).

An eskemmoù hag an atalieroù a vo e galleg.

Ar berzhidi a zeu gant ur raktres istor pe meur a hini, evit ur film, pe ur romant, pe un abadenn vev, pe ur vandenn-dreset... Chom a reoc'h asambles evit aesaat ar soubidigezh, ar c'hrouiñ hag an eskemmoù. Eno e kavoc'h un endro labour graet evit ar sevel skridoù, evit ma vo aesaet an ijin hag ar c'henskoazell.

Eil sizhunvezh (e *Stumdi*)

Krouet e vo un diazez solut evit sikour ar berzhidi da gas o raktres(où) da benn. Pevar ahel a vo lakaet war-wel :

- Deskiñ referañsoù pinvidik evit ar skritur. Gant ur brederouriezh war ar skrivañ e vo kinniget ul "levraoueg-c'hodell" da sikour pep perzhiad gant e raktres.

- Kizidikaat ar berzhidi war dibarderioù ar brezhoneg evit ar c'hrouiñ.

- Pleustriñ war mennozhioù ar berzhidi.

- Kizidikaat ar berzhidi war bed ar c'hleweled brezhoneg (gwirioù, produourien...).

E-pad an eil sizhunvezh e Landerne ho po tro d'en em gavout etre brezhonegerien e Kreizenn Théo Le Borgne e Stumdi.

Gant piv ?

Kaset e vo ar stummadur en-dro gant senarierien a-vicher, leun a skiant-prenet evit ober gant meizadoù diazez an dramarouriezh hag evit sevel skridoù evit ar sinema ha/pe evit ar faltazi er skinwel ha gant stummerien eus *Stumdi* barrek war ar skrivañ e brezhoneg.

Pegoulz ha pelec'h ?

Sizhunvezh kentañ

(18→23 a viz Gwengolo 2018).

6 devezh (42 eurvezh) e Plouneour-Trez (e Ti Groupe Ouest).

Eil sizhunvezh :

(22→26 a viz Here 2018)

5 devezh (35 eurvezh) e Landerne e Kreizenn Théo Le Borgne (savadur kreizenn stummañ Stumdi).

Evit piv ?

Evit kement hini en deus c'hoant da dapout skiant-prenet war ar sevel skridoù, tud a-vicher pe get :

Senarier(ez)

Aozer(ez)-sevener(ez),

Teknikour(ez) sinema,

Skoazeller(ez) skrivagner(ez)

brezhonek,

Kelenner(ez),

Stummer(ez),

Kazetenner(ez)...